


DOUE HA BREIZ




BEPRED

# BELEG DA VIKEN


VAR DON : Elez euz ar Baradoz , pe don Kelven.




Euzan arvor, ar menez, di - re - det gant dudi



Kanomp hi-rio da Zoue , kanomp e veuleudi



Eun deiz kaerevel hen-man, deizeun offer'n nevez



A zo eun deiz a vennoz, paret var eur barrez

## I

Euz an arvor, ar menez diredet gant dudi  
 Kanomp hirio da Zoue, kanomp e veuleudi  
 Eun deiz kaer evel hen-man, deiz eun offer'n nevez  
 A zo eun deiz a vennoz paret var eur barrez.

## DISKAN :

Bennoz, bennoz deoc'h Jezuz, ha mil gwech trugarez  
 Evit an henor dispar, ho peuz grêt d'hor parrez  
 O tont enni da zibab, hag enni da c'helver  
 Unan euz he bugale da vont ouz hoc'h aoter.

## II

Evit ober eur beleg — Doue d'ar vadiziant  
 A verk gant e zourn santel ar bugel 'zo d'e c'hoant  
 Hia dre ma kresk en oad, e skiant, e furnez,  
 Aked Doue varnezan a gresk ive bemdez.

## III

Evit ober eur beleg — Doue d'ar bugelig  
 A laka eur vam gristen edoug e gavelig  
 Eur vam a oar luskellat ervad he bugale  
 E karantez ar Verc'hez, e karantez Doue.

## IV

Evit ober eur beleg — Doue gant plijadur  
 Abred a ro da glevet e c'halv d'ar c'hrouadur,  
 Hag ar bugel dibabet sentuz ouz ger Doue  
 A lavar a greiz kalon : Deoc'h oun korf hag ene. »

## V

Neuze tennet euz ar bed, eo lak t er sioulder  
 Hag ar beden, ar studi, pell a vez e breder  
 : Eun deiz, deiz a levez, e veler var e benn  
 Dourn an Eskop astennet... Beleg eo da viken.

## VI

Skuilhit Jezuz ho pennoz, var ho peleg yaouank,  
 Laoskit varnan ho krasou da redet puilh ha stank  
 : Ar beleg eo ho kannad, mignon hon eneou  
 Ho peuz karget d'hon hentcha beteg porz an nenvou.

## VII

Ar beleg en e zourn sakr a zoug alc'houez an nenv  
 Gant e gomz, hon ene klanv, a deu nerzuz ha krenv  
 : O burzud dreist peb burzud, d'e gomz Jezuz zoken  
 Euz huelder an nenvou, davedan a zisken.

## VIII.

Ya ! Jezuz krouer peb tra, Jezuz prener ar bed,  
 Jezuz gwir vab an Hini, n'euz varnan mestr ebed,  
 Ouz komz nerzuz ar beleg bemdez a zo sentus  
 Hag a zisken euz e lez, var e c'her burzudus.

## IX

Santez Mari, Mam Doue, rouanez Breiz-Izel,  
 Ro t d'hor beleg yaouank, ho pennoz, ho skoazel  
 E garg a zo dem-henvel, Gwerc'hez, ouz hoc'h hini  
 Grit ma kendalc'ho bemdez da zantel t enni.

X

Ha c'houi sant Paol benniget, euz bar skeduz an nenv (1)  
Harpit ho peleg yaouank, ho préc'h deoc'h c'houi zo krenv,  
Ma c'hello var ho roudou, pell varnezo kerzet  
Ha skuilh sklerijen ar feiz, ho peuz deomp digaset.

(1) Pe mar d'eo ar beleg yaouank euz a vro Gerne :  
: Sant Korantin benniget, euz bar skeduz an nenv.

J.-M. PERROT.

---

**Permis d'imprimer.**

Quimper, ce 6 Juillet 1902.

F<sup>r</sup> CORRIGOU,  
*vic. gén.*

O Doue, leun a vadelez,  
Ni a veulo ho trugarez  
Bemdez  
Ni a veulo ho trugarez.

